

# Kantik da Zant Vaudez

Patron Parouz Koadaskorn

## DISKAN

*Zant Vaudez, Patron Karet,  
Chilaouet pedennou  
Ho pugale daoulinet  
Dirak ho relegou. (diou wech)*



1  
Gant hon c'haëran kantikou,  
Hag a greiz hon c'halon,  
Enori ho relegou  
A fell d'imp, Zant Patron.

2  
E-kreiz nerz ho iaouankiz  
C'houi gwitâz Mam ha Tad  
'Vit digas da Dregeriz  
Tenzor ar C'helou-mad.

3  
Gant hon zadou c'heuz bevet  
'Hed kalz a vlavejou ;  
'Liez, gant-hê c'heuz gouelet  
Ha dousât ho foaniou.

4  
Pegen mad oa ho komzou !  
Gant Pebez karante  
E roent o c'halonou  
Dac'h c'houi, mignon Doue !

5  
Pell zo da c'hloar an Euvou  
Gant Doue oc'h galvet,  
Hag evit ho vertuïou  
Hen deuz ho kurunet.

6  
Chilaouet ho pugale  
Hirie, o Tad karet :  
O c'halon, o c'harante  
D'ac'h a vezo hepret.

7  
Zant evuruz, hon Patron,  
C'houi henchas hon zadou ;  
Gret d'imp kaout nerz-kalon  
Da c'honid an Euvou.

8  
Goulennet hennez Doue  
D'an Tadou, d'ar Mammon  
Furuez vad d'ar vugale  
'Vit kerzet n'ho roudou.

9  
Euz a bep drouk hon miret,  
Patron karantezuz,  
War ho Parroz astennet  
Ho torn madeleuz.

10  
Binniget tier, parkou ;  
Hag hon zud diwallet,  
Pa grozou ar gwagennou  
War ar mor fuloret.

11  
War ar gwagennou renet,  
Ha lestr ha merdead,  
Ha d'ar porz o digaset  
D'ar c'houlz, divlam dalc'hmad.

12  
Ni a gar ar bod spern-gwenn  
Ouz garrek ho kador (1) ;  
Ni a gar ho enezenn  
Endro d'ez-hi ar mor (2).

(1) Ekrec'h Ormant.  
(2) Enezenn Vaudez.

13  
An enezen zantelêt  
Dre ho pinijennou  
E zav diout-hi bepred  
C'houez vad ho vertuïou.

14  
Ni blij d'imp mont da bedi  
Da-hont d'ho enezen :  
Elec'h ho peuz pedet c'houi,  
Ve krenvoc'h ar beden.

15  
Deuz an Douar distaget  
Vel an enez ive,  
D'an Env ar beden kasset  
A zav c'houekoc'h a ze.

16  
Ra vezo ho pugale  
Bepred gwir gristenien ;  
Neuze 'vo mad o bue  
Ha kaër-o c'hurunen.

17  
Ha pa vimp er Baradoz,  
O Zant Vaudez karet,  
Ni gano d'ac'h mil bennoz  
Hag ho karo bepred !